


chez nous



LE JOURNAL BÊTE ET MECHANT

Ha en solud e-giz  
ur roc'h koulskoude

... 10 ANS  
POUR UN ATTENTAT  
A LA PUDEUR

HA VO KET LARET EO  
ANARME NEUS GRAET  
AN TAOL

A-BARZH 5 MUNE  
E KOUZHO E BEUL  
D'AN TTAON !



NIV 24

3 LUR

c'est

YOD KERCH' :

CHER BARR



Lun. Seizh eur noz. Berr va anal ha diegus va fluenn. N'on ket em bleud hag e rankan koulskoude boulc'hañ ur gaoz tonket da drefkiñ buan a-walc'h, m' eus aon. Muioc'h a blijadur a gavfen o preg diwar-benn an amzer, ar glav hag an avel e giz ma reer war radio Breizh Fr 3. Siwazh, dija e klevan o safar! Lennerien milliget!!

" Ha ni koumanantet ha netra da lenn e-pad an hañv:nemet galegachoù!

Gwechall e oa Barr Heol d'an nebeutañ! Ha mouget e vije bet mouezh Yod Kerc'h ?

Ur vojenn eo ha netra ken! Ar rener n'eo

ken un teilhok, ur breser kaoc'h, un touser laou! Koulz e vije din kac'hat em bragoù eget

adkoumananantiñ!" Ma, peoc'h en toull-se! Ma tivragezin va

spered dirak ho taoulagad boemet gant ar blev rodellek o kreskiñ warnañ. 'M eus aon n' eo ket bet gwallblijet ar polis gant niverenn diwezhañ Yod Kerc'h! Petra an Diaoul en deus skodeget ar frioù flauer-se? Orgeda, flipi flapa ??? Dreist ar roudenn omp aet evit doare. Displijet ar polis, ar merc'hed, an Aot. Le mercier, memes ar rener e-unan 'zo bet feuket! Boutet 'zo bet 'maez Kargedoull (daoust dezhañ bout anzavet e oa ur fazi yaouankiz nemetken). Yod kerc'h a zo hag a vo ur gelaouenn demokratel pe ne vo ket. Moulet e veze hor gelaouenn en O.S.C Roazon. Galvet zo bet rener an O.S.C. e ti kêr Roazon ha diskouezet zo bet dezhañ peseurt moc'haj a veze moulet en e di. Sabatuet-mik ar paourkaezh den eveljust. An derzhienn hag an alter ennañ. Soñjit 'ta! Emañ an Diaoul en e di. Kaoc'h ha foerigell partout. Ar wirionez 'zo kasas d'an neb 'zo kablus! Ha setu taolet 'maez kanfarted ebatus Yod Kerc'h e giz estrenien. N'omp ket chomet da louediñ avat daoust deomp bezañ dindan gazelge, O ge! Rener an O.S.C n'en deus ket lavaret deomp perak e oamp bet skarzhet. Sañset ne gemeremp ket perzh e buhez kevredigezel Roazon! Alato! Pet ha pet Yodkac'her a zo bet paket, e-kerz an ugent bloavezh diwezhañ, o tizourañ war monumant ar re varv, o tiskar parkmetroù, o tisplantañ gwez treut nouspet bali, o reuziñ e straedoù Roazon la vieja, o kac'hat war moket ar vourc'hizien ha o plantañ bombezennoù e palez ar justis ha me oar-me pelec'h c'hoazh! Kement-se a zo oberereziouù kevredigezhel rik!!

Mod all ez a plaen an traoù dre ar bed. Emañ Carter o veuziñ; gwelet zo bet Somoza war un trimaran e-kreizh ar mor atlantel. N'eus nemet e bro c'hall e chom kalz traoù da ziskar, bec'h de'i eta!

Kinniget eo an niverenn-mañ da vMartial Menard, Per Douget ha d'ar re all o louediñ e Fleury Mérogis.




# 1914-18 MARV 'VIT AR VRO!

PEBEZ  
SKLABEZH!

KENAVO!  
BREUDEUR !!  
AN IFERN, MA'Z  
EUS ANEZHAN  
NE VO KET  
GWASHOCH!

N'OUT KETEN DA  
VLEUD, PO' PAOUR!  
SELL KEMER UR  
BANNE TOMM!



Tudor

N'ÉUS KEM  
NEMET UN DRA  
D'OBÉR NACH MONT  
D'AL LAZHEREZ!  
NACH MERVEL'VIT  
NETRA!!

O TREIÑ DA  
SOT EMAON EN  
TOULL-KAOCH MAÑ  
DEDIEU!!

STIRLINK AR PODOU-  
FER!! PAOUR KAEZH  
PAOTR! N'HOR BO KET  
BOUED HIRIO! AR VOCHED  
A GLEV ANEZHAÑ KEMENT  
A NI!!

IOA KET  
PELL  
HENNEZH

MALOS  
TOU!!

EM





SONJ' PEUS, MARION...

PEGEN KAER  
E OA AN HANV...  
HA MARELLET  
AR GWEZ...

SONJ' PEUS!...

YANNI!  
DIWALLI!





NANN, YANNIG...  
N'EM EUS DAL' HET  
SONJ EBET.. KEN PELL  
'ZO OUT AET KUIT... PE LIV  
'OA GANT DA ZAULAGAD?

LIV AR MARV..?





MERVEL  
 GANT BLAS  
 AR GAOU, AR GWAD  
 WAR VA MUZELLOÛ...  
 MERVEL HEP GWELOUT  
 ACHANOUT.. VA BRO  
 VA MIGNONED...  
 MERVEL HEP  
 KOMPREN  
 NETRA!

NANN!  
 BELEG! N'EO KET  
 BET GALVET GANT DOUE! N'EO KET  
 E-GIZ-SE 'OA DA VEZAÑ! FAZI A REZ!



BEZ E OA AR RIBOUL UR FANKIGELL DIVENT  
GANT AR GLAV O KOUEZHAN MARV E OA AR  
GWARD PA ERRUIS E PENN AR RIBOUL...





TEC'HOUT HEP  
DISTRO... VA BUHEZ  
NA ROIN DEOC'H  
HEP UN TAMM  
DIEGI ... HA  
FALLAGRIEZH

DEVEZHIOÙ A-BEZH  
HEP EN EM WALC'HIÑ, HEP  
BUTUN, HEP BOUED...

DEVEZHIOÙ HA NOZVEZH-  
IOÙ O C'HORTOZ AR RE  
ALL DA GEMER HOL LEC'H...  
PEP HINI D'E DRO DA  
C'HOZANÑ, KUITA!

ABARDEVEZHIOÙ HEP  
SPI HAG HEP JOA .. HA  
DAOULAGAD GWENN AR  
RE VARV O SELLET  
OUZHIN GANT KAB...  
GLAV ER MAEZ  
LUC'HED HA KURUN EM  
SPERED!...

FOLLENTEZ AM ZOUG  
ANKOU AM GROUK

HAG INT-I DUHONT E PARIS  
HAG E LEC'H ALL... OCH EBATIÑ  
O LONKAÑ, O TISONKAÑ MOR  
BOUED... O FOUZAÑ E-GIZ MOC'H!  
O C'HOARZHIN HAG O FARSAL EN  
UR SONJAL ER VRETONED  
"KALONEK" O C'HOARI-LAZH  
EN UR GAOC'HIGELL DIVENT!!!

NA ZISONJIT KET OCH EUS  
GRAET UR LAZHER, UL LOEN GOUEZ  
AC'HANON ...

MERVEL WAR UR  
BERN TEIL!

RAARP!!!

Dislonkañ dirak empennoù divouedet  
va c'hamaladoù... ha lonkañ gaz lazhus  
ha neuze kreviñ... va unan penn... va  
genou o rechetiñ  
mallozhioù... Ruz-gwad!  
Bed foll, da rechetiñ a ran  
gant kas!






# LAZ LAZHAN! LAZH



O! YANN! PEGEN  
SOT OUT! DEOMP DA  
NEUIAL NOAZH ER STER!  
**YANNI!**

## YANNI



HAG E VARVAS ... UN DEIZ  
'GIZ AR RE ALL ... UN ABARDEVEZ  
HEOLIEK, FRONDUS ... UR  
SOUDARD DIANAV ...

PAOUR KAEZH SEÑJ

# ECHU



TERRAIN MILITAIRE  
STATIONNEMENT-CAMPING  
INTERDITS  
SUR 7 Km

PHARMACIE ARSENF  
PHARMACIEN DE 1<sup>re</sup> CLASSE  
EX-INTERNE DES ASILES DE BAGDAD  
22, COURS ALBERT-IV, PARIS-8<sup>e</sup>

EAU DISTILLÉE



Glenmor et Alan Stivell au K.G.B.  
Nous avons annoncé la création d'une nouvelle association bigoudène, le K.G.B. (Killed Gant ar Bazon), qui vendait avec succès ses autocollants en breton. Nous apprenons que deux chanteurs de renom veulent eux aussi militer pour le K.G.B. : Glenmor et Alan Stivell ont commandé une vingtaine d'exemplaires de cet autocollant.



RIQUE

ETON

UDB



KELTIA n° 19  
BOSTONNE REELLY  
24, MERDIGNAL  
ORGANE DE  
RECHERCHE D'UN  
KELTISME MODERNE



corps, des  
USSM  
ements : 42



Marteze e lavaro lod ne dalvez ket ar boan skuilhañ liv, na koll amzer da vurutellañ seurt traouachoù. Er c'hontrol, war va meno, gant an niver a dud a vez troet da lenn seurt romantoù (is-sevenadur benniget an arme eo ha lennerien a gaver koulz a-zehou hag a-gleiz hervez ur pennad embannet gant ar gelaouenn Liberasioñ) ha da vagañ o huñvreoù gant gouroned e-giz Malko, e vefe da klask dezrannañ ar pezh a gaver e-barzh ma ve splann pe zisplann.

An Ao. Gerard de Villiers gant S.A.S. ha romantoù all eus an hevelep kouch a c'hounez ur bern arc'hant diwar e Amerikanouriezh erotek. Fin eo al louarn, gouzout a ra dibab dalc'hmat danvezioù tost-tre ouzh red an darvoudoù bedel; gant un nebeut abadennoù daou-ha-daou hag ur vronn noazh war ar golo e kaver gwerzh atav.

N'eus ket pell 'zo eo c'hoarvezet ganin lenn, diwar un enoc trilivek, un S.A.S. dezhañ an talbenn arouezius-mañ: "AN URZH O REN E SANTIAGO". C'hoarvezout a ra an traoù e Bro-Chile goude taol-stad faskourien Pinochet a-enep gouarnamant Allende. Traoù aes ha traoù soutiloc'h a gaver e-barzh da stern-harpañ an Impalaerouriezh U.S.

Malko Linge a zo ur prifis Aostrian sañset; ezel eus ar C.I.A., playboy gourveli ur, marc'heg kempred e metoù ar spierien hag ar spierezed, Mata Haried anezho.

An taol-mañ e fizier en hor c'howboy etrevroadel ur gefridi a-bouez da gas da benn e Santiago. Karget eo gant ar C.I.A. da saveteiñ buhez ur chilean yaouank, ezel eus ar M.I.R (Strollad marksour an tu kleiz pellañ), en arvar da gouezhañ etre krabanoù ar goronaled. Ar paotr-se, hep gouzout dezhañ, en devoe kenlabouret a-bell gant ar C.I.A. da vare diskrog-labour ar vlenierien girri-saim. Evel a ouzoc'h e oa bet dasparzhet moneiz etre ar vlenierien dezho da genderc'hel gant o harzh-labour ha dre-se da gas d'an traoù unvaniezh gouarnamant Allende. Fellout a rae da baotr ar M.I.R. dre e berzhiadur en ec'hwel sikour da ziazezañ ur gwir gouarnamant dispac'hel e-lec'h gouarnamant kempennelour Allende. Pell diouzh e soñj eta oa kas d'ar galloud ar faskourion hag ur mantr 'voe evitañ trec'h e washañ enebourien an Impalaerourien. Sañset e klaskfe ar C.I.A reiñ un taol sikour d'he servijer a-enep dezhañ.

Repuet eo ar paotr e kannaddi Bro-Italia abaoe an taol-stad, met lazhet e chevrenn digantañ (boureviet he c'horf gant an D.I.N.A., ar polis politik) e tivizo mont da guzh da lec'h all evit saveteiñ e vuhez hag adluskañ stourm ar M.I.R.. Aet eo kuit dre guzh eus ar c'hannaddi ha n'eus mui roud ebet anezhañ pa zegouezh Malko er vro. Mont a ray Malko war-lerc'h ar c'hleizelour ha goude meur a denn pistol, a abadenn voureviañ hag a abadenn orgedus e vo gouezet e dibenn al levr ne glaske rener ar C.I.A. roud ag ar paotr nemet evit e lazhañ ha lemel digantañ war un dro prouennoù atebegzh ar C.I.A. e diskaridigezh gouarnamant Allende ha reoù he c'henlabour efedus gant polis politikel ar gouarnamant faskour, an D.I.N.A.

Etre an holl darvoudoù ez a war-raok Malko, pennek war hent e wirionez dezhañ. Graet en deus e soñj flatrañ an trubard a zo e penn ar C.I.A. e Santiago, e lazhañ a raio a-benn ar fin. Daoust da vourevelezh ar vistri nevez, da vizer ar boblañs vicherour ha da vreinaour ar c'helc'hiad tud a ya d'ober pinvidien veur an "Upper classes" e kred atav e reizhded ar parlamant Amerikan, e meurded Bro-Amerika, mamm ar bed dieub. Chom a ra dalc'hmat divrall ar gouron en e stourm evit ar wirionez Amerikan, a-enep diaoulegezh, krizder ar reizhiadoù komunour.

Dister, dister-kenañ koulz an danvez hag an doare met ur vrav a vruderezh evit ur gevredigezh war he diskar a zo he lezenn nemeti hini ar gounid. Ya, war he diskar emañ ar gevredigezh a rank klask kement a zigarezioù ha disteurel kement a zismegañs war ar reoù all evit en em gantreizhañ.

Brizharnodenn e gwirionez :

- Tamall a reer boureverezh an D.I.N.A. met war un dro e kempouezer gant hini ar M.I.R. e-unan hag a-benn ar fin n'eus ket ken d'en em chalañ, Setu an digarez meur a zeu da skañvaat e fallgoustiañs pa vez heuged gant doareoù ar faskourien : " Ne respontas ket (Malko ouzh arguzenn penn rener ar C.I.A.). Atav ar memes digarez. Kontammus eo an droug. Bep ma stourmer a-enepreizhiadoù fallakr ar gomunourien e teuer da implijout o doareoù ha da goll e ene."

- Arvestiñ a reer ouzh buhez ar bobl o krakvevañ er baourentez, daoubleget dindan samm an tonkad hag an aon da vout flatret. Diskouez a reer deomp ar c'hastaouerezh, ar vugale druilhek e-harz ar palezioù, ar c'hazinoioù 'lec'h ma tispign diskorpul an intelitgensia e leve. Ur goustiañs prenet marc'hadmat ha mat pell'zo! En e vleud emañ an haroz e kelc'hiad gwasker pinvidien Santiago. E-giz Amerika eo pep tra e-touez ar re-se, koulz an dilhad gant ar re yaouank hag ar sonerezh an arz h.a....

Pezhell met a-du gant an Amerikaned. N'eus forzh penaos, petra a gaver



en tu all?

- Diouzh pezh a lenner ne vefe e Bro-Chile nemet ur strollad sponter o stourm a-enep gouarnamant Pinochet, ar M.I.R. an hini eo. Stourmerien galonek eveljust met petra o deus graet ivez ma n'eo ket aesaat donidigezh ar goronaled. Ken feuls hag ar re 'zo er galloud int, boureviañ a reont egisto. Petra a c'hell bezañ an tu kleiz pellañ ma kerlabour gant an tu-dehou pellañ. Nann, ar re-se 'zo komunisted eus ar re washañ tout ha war o divout n'eo ket kuzh pezh a soñj paotr ar C.I.A. : "Soñjal a reas Malko en e gefridi er c'hambodj bloaz a-raok. Na pegen trist! Ar Ghemered, tud ken kuñv anezho, ret dezho bremañ plegañ dindan ar gazelyev gomunour".

Distumet, distreset, spazhet eo kement tra a c'hellfe lakaat diaes an Amerikanouriezh santel. Ar paour-kaezh surealisted a weler o zaolennoù a-ispilh ouzh mogerioù tiez tud tost-tre ouzh ar jeñt. Diskouez a ra deomp ur bed gourveliour ha brudañ a ra seurt tra. Ar merc'hed 'zo peurvuañ c'hoarielloù doujus-tre d'ar wazed, a werzh dezho o c'horfoù marc'hadmat." E sevenadur Amerika al Latined ez eo " el machismo" un elfenn a-bouez-bras" .Ober a reer eveljust digudenn ivez gant traoù ar relijion, beleien, tud a iliz o kenvevañ gant ar bed-se. Traoù disleberet, dezho ster ebet ken." Koll e ene " a zo un dro-lavar a gaver alies a-walc'h pe c'hoazh " Un ael a dostaas, a droas kein hag yeas kuit feuket". Galloud ar playboy a zo dreistpriziet, den pinvidik, tenner dispar ha merc'hetaer drastus. Evit pellaat un tammig muioc'h eus gweledva boas al lenerien e reer ivez amañ hag ahont gant ar yezhoù all, Saozneg ha Spagnoleg dreist-holl. Frazennoù berr n'int ket atav eus ar reishañ nag e-keñver an degouezhioù nag e-keñver ar c'hevreadur. Egzotelezh marc'hadmat eta en ur bed Manikeour 'lec'h ma koroll un nebeut tudennoù, dezho emzalc'hioù gwall-sonn.

Marc'heg kempred en un uhel gevredigezh Amerikanekaet etrevroadel, trevadennek hag impalaerourez. Koulskoude pe evelato e kav ar bed skedus-se a otoiù nevez-flamm, a verc'hed burzhudus, gwerzh tro-dro deomp el levrديوù ha war daolioù-kont ar burevioù-butun. En hor c'hevredigezh frankizour, o vont bemdez war amerikanekaet n'eus ket da souezhiñ rak seurt lennegezh pa 'z eo he freder hag he lusk pennañ ar gounid ha tra ken! Ren a ra lezenn ar gounid war ezhommoù mab-den er gevredigezh kevalaour. Mestre eo ar beveziñ war bep marc'had. Koulz war dachenn ar stlennañ yoc'hek (mass-media) ha war hini an embann ez eer war-du un eeunekadur atorus, war c'hlozañ ez a ar c'helc'h hep ode ebet evit an hinienn. Embann a ra ar vourc'hizelezh menozioù an naontekvet kantved, talvoudegezhioù pe ziskaret pe aet er-maez eus ar c'hiz, pe menozioù frankizour a zieubidigezh ha me oar me... War dachenn ar sevenadur, ar reizh h.a. ez eus ur yoc'hekadur anat met

touellwelus, n'eus tamm gwerinekadur e gwirionez met hepken aozadur ur yod pegusa ha stambouc'hus en ur snak-bar digor d'an holl betek gouzout... Da skouer war an dachenn bolitikel e c'heller gwelout efedusted al labour doñvaat kaset da benn gant ar pellwel, gwellañ ijinadenn ar stlennañ yoc'hek eo lakaat an dud da grediñ o deus komprenet disentezioù n'int ket evit meizañ... Brizhwerinelezh e gwirionez 'lec'h n'eus mui tamm plas ebet evit ijin dieubiñ an den. Ar gudenn eo penaos boulc'hañ un hent all d'ar ouiziegezh pe d'ar c'helaouiñ da vihanañ ha ne vefe ket e dalc'h mistri ar c'hevala, evit se e vefe ret da gentañ penn diguzhat ar c'henemglevioù tavet a genlabour da zerc'hel d'ar gevredigezh beveziñ hec'h unelezh dindan maskl hec'h enebiezhoù war-c'horre... Ha posupl eo e werzhfe ar vourc'hizelezh he marv ivez? Gant ma vo gwerzh n'eo ket chalet strishañ bigoted ar vro da dennañ amplet eus ar bornografiezh na gwashañ patromed da skignañ dastumadeg Maspero ha reoù all a ziskouezer ken brav eo levrioù. Betek pelec'h e c'hell bout atorus ur gevredigezh hollc'lec'h n'eus dislavar dispac'hel gwirion ebet etre an enebiezh oberiant hag ar vourc'hizelezh er galloud? War unvantekaat ez a ar gevredigezh c'hall, ouzh skouer an Amerikaned.

Peseurt plas eta d'ul lennegezh dispac'hel divouget, diarallekaet ma c'heller lavarout? Er bountad breizhek e ranker ansav e chom gwall-zister an eost er bloavezhioù-mañ. N'eus bet koulz-laret avelal yac'haus ebet abaoe Gwalarn. Petra skrivañ, evit piv, pegement a dud? Chom a ra atav ken diaes da zirouestlañ ar gudenn. Adembann a reer levrioù kozh pe nevesoc'h sanket mat pe zivat er werc'helezh henvoazel Breizh-Izelek met ne zeu ket kalz a nevezenti. Darempred al lennegezh, an arz hag ar gevredigezh ma vevomp enni a zo atav ken luziet.

Digeriñ ar prenestr war ar bed diavaez 'zo d'ober, pas atav evit treiñ Soljenitsyn avat. Nag evit treiñ S.A.S. anat deoc'h; mont war Asterikaat kennebeut n'eo ket un diskoulm. Hervez tud 'zo e vefe tremen poent kaout ur San Antonio bennak e Brezhoneg, din-me e c'hellfemp krouiñ kalz azasoc'h ouzh ar pleg m'emaomp dre wriziennañ ar c'henderc'hañ Breizhat er gevredigezh digempouez a stourmoù ma vevomp, kent gortoz kaout ur sol kevredigezhel klokoc'h hag an doare sevenadur a zeuio da heul. Kement-se evit klask sevel ar ouel a-ziwar santelezh nep oberenn brezhonek nevez-c'hanet, ha lemnañ laonenn ar sell buruteller e-keñver lanv an troidigezhioù, adembannadurioù, breizhizellachoù pe roazhonegachoù. Met din-me evel d'an nagennerien all e c'heller atav respont evel ma ra ar Brogonour



ANEZ LABOUR  
 PREZEG ANER  
 KENTAN PREZEG  
 ZO OBER

Bec'h d'ar bluenn eta!!!

**Staat  
 Amann  
 Super**



'ENEZ  
**SUPER LE GALL**



KUZHET  
 E DA E  
 ESTAJ  
 DIWEZHAN  
 AN  
 EMPIRE  
 STATE  
 BUILDING

Sikouret  
 gant  
 BR  
 CIA



AZE 'MAÑ AL LOEN VIL! HAG  
 EMAÑ O C'HOARI UR PLAC'H!!  
 BUKET E FLEMM(ing!)GANTAÑ  
 ETRE E ZIVESKER! GANT  
 AR VEZH! NE VIN KET PELL O  
 VRUZUNAÑ AN NAZI-SE,  
 MEVEL PERROT! FASKOUR  
 GWALLER VIL!

RA FLISTRO!



BREMAIK  
 E TIFRONKO  
 DA OUELAN  
 EM DIVREC'H!  
 ....  
 GASTIG  
 VIHAN!



PENAO!

PLIOUTCH  
 TCHIK!  
 TCHIK!  
 TCHAK!  
 PIOTCH!



**RAH!** DAMNED!

l. dik

# HA YOD KERC'H O LAK' BIRVILH E TOUEZ AR C'HRANKED KOZH

Evit ar wech kentañ ez eus bet ur pennad hir diwar-benn ar B.D e brezhoneg en ur gelaouenn e galleg. Skrivet eo bet gant Ph. Durand er c'helc'h gelaouenn " POURQUOI ?". Eno e oa kaoz eus embannadurioù KOMZ hag ARZ BREIZHEK ha meuleudioù e-leiz evit YOD-KERC'H . Biskoazh c'hoazh aboe m'eo Yod-Kerc'h ar gelaouenn gaer a anavezit ne oa bet roet kement-se a vel da Yod-Kerc'h. Ma rafe an holl dud e-giz se e vije bet 10000 koumananter abaoe pell ! Koulskoude, memes e-touez ar goumananterien fealañ ez eus enebourien touet. An Aot. Le Mercier a zo en o zouez.

---

A. LE MERCIER

6 rue Beaumarchais

29200 BREST

Brest le 22 juin 1979

Monsieur le Directeur,

C'est avec un certain effarement que je viens de prendre connaissance de l'article "La B.D. bretonne" paru dans le n° 146 de "Pourquoi?"

L'article comporte à tout le moins une contre-vérité évidente. Une seule bande <sup>a été</sup> imprimée et éditée sous forme de livre (FRI KORLOKO, p.23, bas de page) par AL LIAM (1) qui certes ne roule pas sur l'or. Par contre, toutes les autres ont pour éditeurs Casterman, Dargaud, Dupuis, qui sont loin d'être de pauvres "plouks" de "l'intérieur".

Il y a cependant une vérité éclatante dans cet article (p.30) " une mauvaise connaissance du breton de la part de certains auteurs." En effet, on a souvent l'impression de lire un déclic du français, quand ce n'est pas carrément du charabia, surtout dans les albums édités par ~~Dargaud (Astérix)~~ Dargaud (Astérix, Lucky Luke).

Mais où les bras m'en tombent, c'est quand je vois Pourquoi? ouvrir ses colonnes à YOD KERC'H (2), revue pornographique de bas étage (il y a des perles de temps en temps, mais elles sont vraiment rares). Cet article, au lieu d'aider les amicalistes qui se dépensent sans compter pour essayer de sauver la langue bretonne, ne peut que nous faire un tort considérable, tout d'abord en donnant de la presse en langue bretonne une idée vraiment peu reluisante, ensuite en utilisant la trop fameuse orthographe dite "zh" (Breizh, Brezhoneg, au lieu de Breiz, Brezoneg), qui avait été imposée par les nazis sous l'occupation.



Je crois qu'avant de publier des articles sur la langue bretonne, il serait bon de les soumettre tout d'abord pour avis aux trois sections F.O.L. de Basse-Bretagne, qui ont tout de même un droit de regard sur notre revue.

(1) AL LIAMM est une revue littéraire de langue bretonne, de bonne tenue, mais qui a écrit dans son n° 20, page 31: "de 1940 à 1944, il passa un vent de liberté sur la Bretagne". Tout un programme!

(2) Parlant d'une revue littéraire de langue bretonne - qui n'est pas AL LIAMM -, Yod Kerc'h, dans son n° 22, la qualifiait de "gallgar" c'est-à-dire de "francophile". Donc, a contrario....

A wir galon ganeoh, Sincères salutations,

A. LE MERCIER.

---

Glebiañ a ra e roched ! -lar eñ, o klask tennañ ar brezhoneg maez eus ar vouilhenn --lec'h eo bet lakaet un tamm mat dam da skolaerien egistañ--. Mat-tre, met tu zo d'en em c'houlenn perak e ra kement-se ?

- Perak e fell d'an Ao. Le Mercier sañsurifñ kement pennad diwar ar brezhoneg a vije embannet e-barzh kelaouennoù an "Education Nationale" ?
- Perak e skriv par ma c'hell ez eo ar ZH ur skritur diazezet gant an Nazied pag e oar mat eo bet savet e 1937 ha laket er pleustr adalek 1941 ?
- Perak e fell dezhañ disteraat plas ar B.D. e breizh pag e oar ervat ez eus bet embannet meur a levr hag en o zouez "Kanfarted ebatus Kervreugeud" hag "ar mell lost Pluñv" gant Komz hag arz breizhek ?
- Perak mennegifñ (o komz eus Al Liamm), ur frazenn verr gant Roparz Hemon, hag hi kollet e ster ganti, distag eus ar peurrest ?
- Perak ema o klask sankañ e lennerien Pourquoi n'eus nemet brezhoneg fall gant albomoù asterix ... ?
- Perak e lenn aketus ar "revue porno de bas étages" nemeti ?

N'eo ket ar wech kentañ e vez roet deomp da lenn seurt lizheroù diwar zorn an Ao. Le Mercier. Hemañ, skolaer kozh war e leve, a vourr ken-kenañ oc'h hisañ ar chas war-lerc'h tost kement tra a vez savet e brezhoneg. E brezhoneg a laran ha n'eo ket e brezoneg, rak lakez ar falc'huneg eo an Ao. Le Mercier. Setu perak e ya kazel ha kazel --ha eñ ezel eus ar P.C.F.-- gant ar Chaloni Falc'hun hag eskopti Penn ar bed, ar re nemeto oc'h implij c'hoazh ar skritur-se, gant e genseurtes eus Skol-veur Brest, deuet eno dindan a'kell ar Falc'hun ha dre hud ar vaguilherez skolveuriek.


Souezhus n'eo ket kement-se, rak n'eo ket un afer teknik a skritur a rann an dud, an ideologiezh ne laran ket. Ma vije paeet an Ao. Le Mercier da zistrujañ labour ar vrezhonegerien ne rafe ket gwelloc'h ! Ur gwir 5<sup>ème</sup> colonne a zo anezhañ ! Arabat lezel anezhañ d'ober e jeu, respontit kerkent ha ma welfoc'h e vinim skrivet un tu bennak

NUI A SANTI PARFETAHANT AN TRUKOÛ-SE A VEZ  
 PROPOZET DEOCH GANT DES INTELLECTUELS POURISET  
 NET O ESPRIJOÛ GANT AR POLITIK. EMaint OCH  
 ESAEAÑ SEPARIÑ AR BRETAGN DEUS AR FRANÑS -  
 PUBLIAÑ A RAONT CHOURNALIOÛ HA N' OCH KET  
 KAPABL DA LENN MEMES. NEO KET

DROL. N'EO KET BREZHONEG  
 KEN AR PARLANT A  
 GAVER EL LITERATUR-SE.  
 DOUE HEBKEN A OAR PETRA  
 EO(1) ENRICHISAÑ AL  
 LANGAJ A RAONT, A LARONT.  
 N'EUS VERITE EBED AZE.  
 EMaint OCH ESAEAÑ TROMPAÑ  
 TOUD AN DUD.

MED NI, TUD EDUKET  
 E TOUZ AR PEUPL, A RESPONT  
 PROMTAMANT. NON, NI NE  
 BARLOMP KET AR BRETON-SE...

(1) HA C'HOAZH - NCTENN  
 GANT AN EMBANNER.




mamm, pourquoi  
 y'prononce PAS LES "ZH" ?

NE GOMPRENAN KET  
 RE VAD.

An dra-se zo BREZHONEG  
 LEON, SUR.

C'EST UN DROLE  
 C'EST LA, MEIN

ils sont fous  
 ces bretons



... UR C'HONFERAÑS ZO  
 BET, E BREST, EN UNIVERSITE,  
 WAR AR PROBLEM KULTUREL  
 HAG AVENIR AR REJION...

LON KERNEVEN



- "Gwelet ho peus Holokaust ?"

- "Ya 'vat!" (Ret bout modern, memestra)

- "Ur spont, biskoazh ma buhez 'm bije kredet kement-se! Gwaskañ ar yuzerion evel ma vijent bet morianed!"

AN HOLL 'ZO KAOZ

'Benn ar fin hon eus bet droed da wel' Holokaust, ni ivez. Par d'an Amerikaned ha d'an Alamaned omp, memestra. Perak e vije bet nac'het ouzomp ar pezh a oa roet d'ar re all? Neuze, goude marv ar baotred Kennedy hag hini Martin Luther King, oberour "Ironman" a ginnig deoc'h "Holokaust" pe "buhez poanius ar familh Weiss e-pad ar brezel diwezhañ-toud"... Tink! tink! Arc'hant o kouezhañ e yalc'h ar produkteur. Met al lazhadeg he-unan n'eo ket rentabl-kenañ (Alain Resnais a zo laouen da gemenn deoc'h eo tremenet "Nacht und Nebel" war FR3 da nav eur hanter hag eo bet troc'het ar fin gant bruderezh "Gala de l'union des artistes") Neuze e vo diskouezet deoc'h e-pad peder abadenn karantez, poan-spered, glac'har (hini ar yuzerion hag hini ar vourevion).

Taol brav! Kontant omp bremañ. Dreist-holl an intellektualed c'hall, o doa huchet forzh pegement evit gwelout ar melo-se goude ar match ~~penn~~ sizhuniek en ur sunañ ur banne whisky. Gwelet ha gouelet hon eus, ken poanius e oa... ma c'hredit, tudoù, deoc'h-c'hwi e laran krak en eus c'hoarzh et meur a wech, mezh warnon! Diouzh 'm eus klevet, n'on ket ma-unan-penn... Gwelet ho peus an ofiser SS oc'h en em c'houlenn hag eñ e oa war an hent mat? Gwelet ho peus ar baour gaezh plac'h o kouezhañ a-dreñv karrigel an Ankou?

Da betra o deus servijet ar sotonioù-se, benn ar fin? Da netra, 'michañs. Eo, eo, da Simon Dec'h: n'eo ket fall un tamm bruderezh mod-se just a-raok ar votadegoù.

Boun, n'eus forzh penaos eo achu an afer-se bremañ. Kriz ar Voched, pebezh gouenn! Kozh-ebestel eo ar gonchenn-se, deomp da bakañ ur banne!

.....DIWEZH.....

Ac'hanta, tudoù ouzhpenn tri-ugent vloaz! C'hwi, me lar deoc'h, a zo kiriek d'ar fazh-gouenn. Penaos? N'ouie'c'h ket? Toull ma revr! An hini a zalc'h ar sac'h a zo ken fall evit an hini a lak e-barzh: 'pad ugent kantvedoù o deus an Iliz hag ar gristenien dalc'het mat ar sac'h, ha den ebet en deus lakaet e-barzh, nemet ul lazher enepyuzev a vare da vare. Neuze, pa 'z eo lakaet un toullad milionou a dud war un dro, e rit van da vezañ spontet?

Ac'hanta, tud ma rumm! Warnomp kiriegezh ("respontegezh", 'giz ma lar Morvannou) kampoù Bro-Rusia, Bro-Gambodj, Bro-Sina, Bro-Argentina, Bro-Iwerzhon, Bro-Chili; Warnomp kiriegezh marv Steve Biko, merc'hed Bro-Iran, bugale Bro-Afrika; Warnomp kiriegezh ar brezel peubadus; Warnomp kiriegezh ar c'hamp meur a zo anvet "Afrika-du"! Warnomp-ni, ni 'zo leun hor bouzelloù ha dinet'h hor sperejoù. Ne glevit ket tud boureviet o youc'hal, ne santit ket anal ar bugel-morian o vervel gant an naon, ne glevit ket ar bougnoul o klenmañ en archerdi ho ker? Ne glevit ket tro-war-dro deoc'h ur c'harm dibaouez?



PAOTR ! KAMALAD ! MAT VEFE DIT LENN RUZ-TAN,  
 KELAOUENN LUGERNUS DRE C'HRAS DREISTMENNOZIOÙ  
 HOR C'HAMALAD MAO ZE-DONG, PENNRENER MEUR POBL  
 KADARN CHINA, HEOL RUZ A SKLERIENNO E-PAD  
 KANTVEDOÙ ABLABLA RAGNAGNI  
 RAGNAGNA



RUOCH VIT AR GWIN-MAN NO  
 DIAES DIT KAVOUT, LAKEPOD !

PROURKAEZH ! ...  
 MAO N'EUS LARET...  
 TREVADENNET... REVIZIONIST...  
 PECHED MARVEL... HEOL  
 BANDENN AR PEVAR... RUZ  
 LEOR RUZ... TAZIBAO...  
 LABOUR RUZ... DENG XIA  
 MESER... PING...  
 AN DEMOKRATELE... WAR  
 TIGR PAPER... PEKING...  
 RUZ... PROLO  
 RUZ... RUZ...  
 RUZ... RUZ...  
 RUZ... RUZ...  
 RUZ... RUZ...



HEOL RUZ CHINA ZO VONT WAR  
 SKLAERAAT AN DEIZIOÙ-MAN  
 N'EUS AON...

FAD KAMALAD !  
 HESTRONIET GANT HOR NESTR-  
 BLABLAGNI BLABAGNA...



MA ! MA ! TRAWALCH ! PETRA FO DA  
 EVAN ? GALLOUT RES MEHER  
 VELJUST UN DRA N'EO KET  
 DIFENNET GANT DA RELIJION.

HO ! HAG AR BLEW HIR HAN ?  
 DEGENERET EO DA KELENNADUR  
 HAN ?  
 HO !



DESRET KAZON BET GANT KELENNADUREZH HOR C'HA  
 ZE-DONG HA GANT DENG XIA-PING, KAMALAD DIBIK  
 HEOL RUZ CHINA EN. HOR C'HALONDU PROLETOURIEN DORN  
 LABLA RAGNAGNA BANDENN AR PEVAR PLASENN TIEN-AN  
 HA NEUZE E REMERIN UR C'H-KOKA-KOLA.

A ! VA ! GWIR EO .  
 BOESON NEVEZ AR  
 BROLETOURIEN CHINAAT



# ELLE NE VOULAIT PAS RENTRE AU PAYS : IL LA TUE

TUD BRO C'HALL: DROCHOC'H DROCHAÑ :

Ur dresadenn a ne gavfoc'h  
ket 'barzh "CHARLIE HEBDO"!



## DEFENSE DE THESE

Le Doyen de la Faculté des Sciences fait savoir que M. Claude Teisson, Ingénieur agronome, chercheur à l'Institut de Recherches sur les Fruits et Agrumes soutiendra une thèse de Doctorat Es-Sciences Naturelles sur le sujet suivant :

«LE BRUNISSERMENT INTERNE DE L'ANANAS».

Cette soutenance aura lieu le mercredi 23 mars à 15h30 à l'Amphithéâtre «A» de la Faculté des Sciences de l'Université Nationale. Le public y est cordialement invité.



Skrivit e brezhoneg d'ar re a lenn Yod-Kerc'h

Le Guellec Jean	77661 D-4-02	7 Avenue des peupliers
Le Bévillon Hervé	83830 D-4-18	91705 Fleury-Merogis
Douguet Pierre	84182 D-4-28	
Menard Martial	84184 D-4-45	
Merer Christian	84185 D-4-26	
Le Moigne Pierre Yve	84183 D-4-40	
Puillandre Yann	685239 BA-13	1 Av.Division Leclerc 94261 Fresnes Cedex
Bernard Jacques	Q.S. 3479	10 quai de la courtil 77011 Melun 42 rue de la santé 75014 Paris
Grall Jean-Charles	196414 1/34	

HA D'AR RE ALL IVEZ.  
An holl re a zo ba'n Toull a zo koumanantet evit netra  
gant ma vo goulenet ganeomp kas dezho !!!

● Mise en liberté de dix militaires « casseurs ». — Dix jeunes engagés volontaires du 3<sup>e</sup> régiment d'infanterie de marine, qui avaient organisé, à la veille de leur départ pour le Tchad, une « expédition punitive » dans le centre de Vannes (Morbihan) pour venger l'un d'entre eux victime d'une agression, ont été remis en liberté mercredi 13 juin, après quinze jours d'emprisonnement. Ils avaient été condamnés à un mois ferme pour infraction à la loi « anti-casseurs ». Leur avocat a fait observer qu'ils étaient plus utiles au Tchad qu'« en restant à jouer à la belote dans une prison ». — (Corresp.)

Gout a ouieimp e oa  
ur bern tud en toull  
hep abeg. Bremañ  
e ouezomp e vez  
laosket tud da vont  
gant o roud gant ma  
vijent en arme ha ma  
prometfent lozhañ ur  
c'hastad morianed !!

YOD KERC'H

Numero 24. Prix 3 Fr

Numero C.P.P.A.P. 56577

Dépot Légal 3<sup>e</sup>me Trimestre 1979

Imprimerie S.O.S. B.D. Kleud Rouz Fouesnant 29

Directeur de la publication : Tugdual Huon

## LES TROIS MOTS QUE LA FRANCE A GRAVÉS DANS LA MÉMOIRE DE TOUS LES HOMMES: LIBERTÉ, ÉGALITÉ, FRATERNITÉ.